

RECIT

Deus ar Maleuriou arruet en departamant ar Var

EN DRO DA SANT - TIENNE

OCCASIONET GANT AN ORACH

AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEN DREMENET.

970 c

Jesus, ma Salver adorabl,
Obtenet d'ho pec'her ingrat
Ar sclerijen da discleria
D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel, deus an env,
Gret din explican hep dale
Ar suit dimeus ar maleurio
Hac an darn deus ar miraclo.

Quement-mâ so bet arruet
En departamant Var hanvet,
Dre deluch dour ha curuno,
Hervez ma raport ar c'helo.

Ma speret so epouvanter
Ha ma memoar so toublet
O tonet da sonjeal explican
Eur malheur an effroyaplan.

Un ilis hanvet Sant-Germain,
Un templ santel d'ar gristenien,
Gant ar c'huruno attaquet.
Etre ma voat en ofern bred.

Habitantel leis an ilis
A voa o assistan en offiç ;
Den neus gallet sortian ;
Oll o deus renquet perissan.

An douar a deu da grenan
Hac a ra d'an ilis coean
Var gein quemend a voa enni,
En eur momet, d'ho ecrasin.

O ma Jesus! tristan malheur !
Dre eur merq dimens ho coler
Perisset tud en ofern bred
Hep ma so hini sortiet.

Totaliset gant tud savant,
Var ar bord a pevarzec cant
A voa en ilis biniguet,
Hac a so devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur cart-heur
Goude ma voa fin d'ar malheur,
E plaç an ilis so cavet
Eur stang hir ha ledan meurbet

Flotañç ar caeran batimant
So cavet a donder er stang ;
A c'hoas e lavar ar scritur
Ne dap quet ar fonç ar musur.

Pedomp Doue ar vir galon
Da accordin deze pardon
Ha d'ho laqat oll da repos
Er gloar demeus ar barados.

An outro Richard, deus e di,
Dious e tud o quimniadi,
A guemeras e diare
Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dec pas dioute,
E return e dro adare,
Hac a lavar n'eur goir cren :
Adieu, ma zud, evid biqen.

An itron, o clevet anezan,
A commanças da hirvoudan :
Perac, ma pried, emezi,
E teut cren d'hon abandonin.

Evel ma hantre er c'hoat bras,
An dour varnezan a deuas,
Hac en em retir ep appel
E appu, er span eur rochel.

Assambles gant an dour courant
E commanç un fan violant,
An tempest hac ar curuno
Quen a sonje e voa maro.

Pardon, ma Doue, emezan ;
Aman e renquan perissan,
Ep gallout en em repuin
Ha bean cals a vado din.

En eur sevel var eur garrec,
E neus bet apercevet
An fan coeet dious an evo
Var e noblanç hac e vado.

O bebes desolation
A antreas en e galon
Guelet consomin e vado
E vreg hac e vugaligo !

An itron, o velet an amzer,
A supplias prest e mevel
Da vonet da glasq he priet,
Mar guie pelec'h e voa eet.

Evel ma hantre er coat bras,
Souden gantan e erruas,
E appu ar span eur rochel
Hac e disposet da vervel.

Sevet, ma mest paour, emezan,
E oc'h var ar poent da perissan :
Gant Doue e eo preservert
Ho pugale hac ho priet.

Respont a eure d'e vevel.
E lezel enon da vervel,
Pa oa consommet e vado,
E vreg hac e vugaligo.

Renquout a ra touet dezan
Qent men deus credet anezan,
E voa preservert gant Doue
E pried hac e vugale.

Gant cals a poan hac a courach
E teujont e mæs ar c'hoat bras,
En dour betec o dio gazel,
An otro-man hac e vevel.

An atro so n'em vuestet
Dre eur miraclo e voa rentet
E quichen gruo ar vezen
Ne voa e dud evit souten.

Pa voa gant e dud o parlant,
E teu var e lerc'h un torrante,
Hac ar vezena voa ennan
Neus groet dezan perissan.

Chetu i chomet intanves
Ha hi leun a tristedigues,
Er voen gant e zri buguel
Hac i disposet da vervel.

Pa eo bet bolante Doue,
E eo et an dour ac'hane,
Hac int sicouret da disquen
Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h'heur ha tregont a amzer
Int bet er voezen en miser ;
Da soulagin ho c'halono
N'ho doa nemert an delio.

Ar mest a commande er forgeo,
An otro Seveni e hano,
A voa attaquet gant an dour
Ep gallout dont da n'em sicour.

Prosternin a ra dan daolin
Da supplian hon Mest divin,
Hac hon Mam santel ar Verc'hes
Da vezan e avocades.

Mar sovetean ma bue,
Ha ma ouvrierien ha me,
Me a savo un ti ar c'haeran
Evit ar pevien er vro-man.

E nebetoc'h evit pemp minuten,
Eo beuzet e ouvrierien,
Ar forgeo, vare'hadoures,
Tout int perisset assambles.

Henor d'an otro Seveni
Var an douar ha melodi,
Ha pa hei divar ar bed-man,
Ar barados da jouissan.

RECIT

COMPOSET A NEVE

VAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA BARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

Var eun ton neve.

Me o ped, assistantet, da glevet recitan
(Ma-unan hon estonet dimeus a guement-man)
Ar pez a zo arruet var ar c'hopi gallec,
Mar gallan gout ar feçon d'ho zrei en brezonec.

Mes, qent avanç davantach, e c'houllan sclerijen
Digant ar Speret-Santel da riman pen-da-ben
Qement gir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonec.

Ur vreg yaouanc magueres, o tistrei a Baris,
Bet e quere'hat ur buguel eus a dy ur bourc'his
Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
Evit sicour o zével ha gonit bara dê.

Dre ur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar guer
Hac eo bet attaquet, sious! gant ur voler,
Hac en guisquet an belec, o tont d'he bonjouri :
Ar goat en e goaziet a deu da remui.

« Bonjour, eme an den-man ; erru oc'h, ma greg vad.
— Ha dec'hu pareillaman, emei, antrou 'n abbat ;
Souet hon ous o goelet aman o pazeal,
Rac ar c'hoad-man so brudet da vean un doull fall.

— Doue, eme al laer-man, a breserv pep-hini :
Me so aman o vale da n'eum disenoi,
Hac e meus ma flijadur o c'hortos overnia :
Da laret ma breuvial na deu den d'am zroubla. »

O qerzet en e c'hever en deus interrojet
Da c'hout a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet,
O voelet e oa ganti var e brec'h ur buguel,
Hac en guisquet ar c'haeran, casi evel eun aell.

Goude en deus goulennet ontu incontinant
Ha ne devoa bet netra evit avançaman,
O qemeret ar buguel da zicour e soigni,
Da denna ar virione, margalje, diganti.

« Eus, emei, antrou 'n abbat, arc'hant a meus touchet :
Gant leur em eus recevet evit e guemeret,
Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
Qent mont emes ar c'hoad-man, an innoçant ha me.

— Na sonjet qet gement-se, emean, ma greg vad ;
Me a vo dec'h compaignon da vont er mes ar c'hoad :
E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,
Nemert ma renqet rentan ar pez o c'heuz touchet. »

A zidan e soutanen e tennas ur zabren
Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn,
Hac e c'hontennas ganti ar yalc'h pe ar vue,
Ha laret dean pelec'h e deus lacqet ane.

« Plasset e meus aneze en dro d'ann innoçant ;
Goel e ganen ma bue evit aour nac arc'hant,
Caët a ret aneze o tont d'e zispaca,
Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan. »

Cregai a ra er buguel en ur memes instant,
Evit dont d'e zispacan da guemer an arc'hant :
Dre bermission Doue e tappas ur zabren,
Ha gant un tol, dre vonheur, en deus rannet e benn.

Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,
E ranqas mervel eno er plaç subitamant,
Hac ar vreg, hac ar buguel dre viracl zo rentet
Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erras hac o deus goulennet,
O velet ar goad outi, petra oa arruet,
Hac e deveus ispliqet diraze pen-da-ben
En devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

« Dont a reet ganemp-ni, emeze, var o qis,
Evit ma elfoump goelet ar merq ho vaillant. »
Pa-oue fouillet an den-man, eo e armo cavet,
Diou bistolen a daou den, ur zabren, ur sifflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho procès-verbal,
Unan demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,
Hac en em rentas pevar deus e gamarado
Da velet o c'habiten var an douar maro.

Pa veljont an habijo e fellas d'e tec'hel :
En um renta a renqont pe denan da vervel,
Ha lezel ho garotti hac o c'has d'ar prison :
En Paris e recevont ho c'hondaonation.